



Kenrener-ez skolaj

Kinnig labour embannet d'an / ar lund 05 mai 2025

Lec'h : **Beuzit-ar-C'hoadoù (35)**

Doare post **CDI** H/F

Miz Even 2025

Deskrivadur ar post-labour

Emañ Diwan o klask ur c'henrener / genrenerez evit ar Skolaj 35 e Beuzit-ar-C'hoadoù, an hini kentañ en Il-ha-Gwilen. Ul lec'h n'eus ket e bar evit a sell ouzh diorren ar brezhoneg. Pa ranker plediñ gant al labour melestradurel rik, e vezer e-kreiz ar jeu ivez evit kemer e lod e raktres kaer ur skolaj e brezhoneg penn-da-benn eus ar c'hwec'hvet klas d'ar c'hlas trede ! Ur skolaj nevez flamm e vo ouzhpenn da-se.

Kenrener-ez ar skolaj a zo e-karg eus mont en-dro an ti-skol war an tachennoù da heul :

Pedagogiezh
Buhez-skol
Melestradur
Surentez

D'ar c'henrener / genrenerez eo da gas war-raok al labour evit seveniñ e/he g/c'harg. Evit-se e ranko :

Aozañ ha ren an emvodoù diabarzh : emvodoù skol (c'huzulioù klas, emvodoù pedago, emvodoù skol-ebardus...), an emvodoù kuzul merañ ;
Aozañ arnodennoù an deskadurezh stad pe Diwan ;
Merañ skipailh ar skolaj, an implijoù amzer, tuta implijidi ;
Sevel ha merañ ar budged ;
Bezañ e darempred gant ar familhoù, servij Eil Derez Diwan, an deskadurezh stad, an Departamant, ar Rannvro ha tud ar vro ;
Labourat ingal gant tud ar skolaj war ar raktres pedagogel ha desavadurel.

Skiant-prenet ha barregzhioù goulennet

Doare den

Diplom Bak + 3 war un danvez a vo kelennet er skolaj dre ret
Skiant prenet en deskadurezh stad d'an nebeutañ (kelenner-ez, penngasour-ez (CPE), kasour-ez)
En ho aes oc'h evit daremprediñ kenkoulz dre gomz ha dre skrid kement e brezhoneg hag e galleg, mestroniañ a rit an urzhiaer hag anavezout a reoc'h mat mont en-dro an Deskadurezh Stad.
Efedus evit aozañ ho labour e ouezit merañ an danvezioù mallusañ ha gouest oc'h da verañ meur a zoser war un dro.

Titouroù all

Lec'h labour : Beuzit-ar-C'hoadoù
Kevrat : Didermen
Deiziad kregiñ : Miz Even 2025
Gopr kregiñ : diouzh emglev Diwan diwar-benn gopr ar renerien eil derez

Statud : Sterniad·ez

Spletoù : gwarez yec'hed, prevoyañs

Trugarez d'an dud a vefe dedennet gant ar post dont e darempred ganeomp evit kaout muioc'h a ditouroù.

Trugarez da gas ho CV mui lizher en em ginnig da **tuta@diwan.bzh a-raok ar 15/05/2025**.

Sellout ouzh ar c'hinnig : <https://www.diwan.bzh/br/offres-emplois/codirecteur-rice-de-college-050520251517>